

Adalek 3 bloaz - 5€

niv. 123
Du 2011

ROUZIG

Bruzunig, ar c'hi bihan-dister

An hunvre entanet

Ar bomperien



GOUEL ROUZIG
d'an 11/12/2011
Kastell-Nevez ar Faou
e sal ar Sterenn
adal 3e g.m.

**WAR HENT AL LOENED
AR BOC'HIG-
RUZ**



**El liorzhoù pe er c'hoadoù e vez kavet
ar boc'hig-ruz. Ne vez ket spontet gant an dud :
tennañ a ra gounid eus labour al liorzhourien.
Debriñ a ra preñv, buzbug pe amprevaned bihan,
ha frouezh e-pad an hañv.**

**Ne vev ket ar par hag ar barez asambles e-pad ar
goañv : pep hini en deus e dachenn. Ha ne blij ket
d'ar boc'hig-ruz kavout ur boc'hig-ruz all war e
dachenn. Neuze e tiskouez e gof ruz. D'al liesañ
eo trawalc'h da gas an hini all kuit !**